

(42, suite).

## Ar Boutou bêr.

Var ton : du haut en bas .

Eur boutou bêr  
 A zo eun egar beza enno ;  
 Eur boutou bêr  
 A zo eun anter dizesper .  
 Pion a oufe ta padout ganto  
 Ma rangfe bemdez doug'en ato  
 Eur boutou bêr .

(43)

Eur boutou bêr  
 A ra da galz beza merzerien ;  
 Eur boutou bêr  
 Bez'ent coat, pe otramant lèr,  
 Evel ato e c'hlargint eun den :  
 Eur boan eo dezgan rancout doug'en  
 Eur boutou bêr .

Eur boutou bêr  
 A laga calz a duol da china ;  
 Eur boutou bêr  
 Ne vez gantè nemet mizer ;  
 Mizer pa chomer da eana,  
 Brasoc'h mizer pa ranger treina  
 Eur boutou bêr .

(= c'hina ?)

(44)

Eur boutou bêr  
 A zo goasoc'h evit na zonger ;  
 Eur boutou bêr  
 A den alies mil afer :  
 Divar eun netra e comanser,  
 Hag evit eun netra e toug'er  
 Eur boutou bêr .

130

Eur boutou bêr  
 A ra da zertey tied counnari;  
 Eur boutou bêr  
 A dro dezgo o c'haracter.  
 Gant ar seurt-se n'elles get c'hoari,  
 Na vezer caos dezgo da greg'i  
 Er boutou bêr.

Eur boutou bêr  
 A dlefet caout mez eus o doug'en;  
 Eur boutou bêr  
 A vez eur fars en peb-amzer.  
 Me ve quell garen mont diarc'hen  
 Erit na vez caout james biqen  
 Eur boutou bêr.

(45)

(Vol. II, p. 42-45.)